

# Lodenn III- Frañs hag Unvaniezh Europa er bed

## Tem I. Unaniezh Europa; un « tiriad nevez »

### A. Un tiriad dibar hag ur sevel dibar

-Abaoe 1957eo bet kresket a **28** Stad en Unaniezh Europa.

Abaoe 1986 ar Stadoù nevez en UE zo dreist-holl re a **Europa Kreiz hag Europa reterel** àr-lerc'h bout dieubet doc'h ar beli komunour er blezadoù 1990.

**-506 milion** a annezidi en UE ar pezh a ra 7% ag ar blanedenn 318 milion e SUA/1357 milion e Sina).

**-4 milion a km<sup>2</sup>** get **116 annezad/km<sup>2</sup>** ( SUA: 9.6 milion km<sup>2</sup>) get ardremeziou ha meteier liesseurt: hin bolet e Norzh Sweden, hin veurvorel e Breizh..;

**-24 yezh** ofisiel : yezhoù germanek, , latin , keltiek pe slavek.

**-25% a PDG ar bed** ha **36%** a budjed an UE evit sikour ar rannvroioù.

Ar c'hêrioù europat a chom en Europa kornôgel :stadoù diazezourien an UE:**Parlamant Europa** e Strasbourg(Frañs);**Komision Europa** e Brukels(Belgia);**Lez justis** e Luksembourg(Luxembourg);**Bank kreiz Europa** e Frankfurt(Alamagn). An ensavadurioù-mañ a labour e-barzh damani ekonomikel, sokial, arc'hantourel, justis...

### Ur sevel dibar get raktresoù boutin

-Diazezet eo saverezh an UE àr an demokratelezh ha gwirioù pennañ gwarezet.

-Kaset he deus an UE ar c'heodedouriezh europat abaoe 1992(feur-emglev

Maastricht) .

Raktresoù ha politikerezhioù a bep seurt:

**\*ur marc'had boutin**: frankeskemmoù ar marc'hadouriezhioù, ar c'hevalaoù

**\*Egor Schengen**: gwir mont-dont evit an dud

**\*Moneiz boutin**: euro

**\*Erasmus**: studioù en estrenvro

**\* Karta ar gwirioù diazez...**



### B. Met diforc'hoù tiriad en Unvaniezh Europa:

-Dizingalderioù etre ar Stadoù ar C'hornôg, pinvidik ha diorret hag ar Stadoù ar Reter, dale gete àr an dachenn ekonomikel ha sokial: **Alamagn, Frañs ha RU a brodu 2/3 ag ar pinvidigezhioù europat.**

**-Ar spas-kreiz, ar megalopolenn Europa zo** kreizennet ennañ an dud, stank-tre eo mailhoù rouedad an ahelioù-kehentiñ hag ar pinvidigezhioù get ar meurgêrioù pennañ ha kêrioù-penn politikel UE.

**-Dizingalderioù-rannvro etre ar rannvroioù lañs ha pinvidik** gete, pelloc'h int ag ar spas-kreiz met liammet mat get ar c'hreiz (ar meurgêrioù bras) : ar beriferienn gentañ eo.

-Evit echuiñ ez eus **an tiriadoù get dale**, paouroc'h a ya d'ober **marzoù**(marges) ar reter hag ar su(àr ar maez pe o-unan).

### C. An diskoulm: ar politikerezh kenstagiñ a-benn digreskiñ an dizingalderioù-rannvro en UE

Raktresoù a bep seurt arc'hantet get aozadurioù disheñvel a UE Pal dezhe eo digreskiñ an dizingalderioù etre rannvroioù a UE.

**FSE**: fonds social européen(font sokial europat): lise Cérusier e Karaez

**FEDER**: fonds européen de développement régional(font europat evit an diorren ekonomikel ha rannvroel): kaout an uhelgas e dapartamant 22; un eil-pont etre Roumania ha Bulgariz àr an Danav.

**Raktres Lyon-Turin**: LTB

**Eurodistrict**: Eurodistrict Strasbourg-Ortenau eo an takad harzaouat gall-alaman a stroll kumunoù a bep tu ag ar Rhin.

## D. Tabutoù, euroamgredourien,gwanderioù en UE

### Kudennoù an UE vez dreist-holl politikel:

- Politikerezh difenn ebet unvan
- Arme ebet na diplomatiezh ebet boutin
- Diaes eo kavout ur c'henemglev da 28 Stad.
- Degemer Turkia
- Gwareziñ ar bevennoù diavaez dirak ar sponterien islamour
- Enframmiñ an divroidi
- Diouer a demokratelezh( ur votateg pep 5 blez evit deputed ar parlamant Europa)
- pouez re-vras ar reolennadur Europa en vuhez pemdeziek.
- rol politikel dre wan ha disemglevioù etre ar Stadoù evit sevel ur politikerezh boutin
- kudenn RU: Brexit

## L'Union européenne en 2016

situation au 1er janvier

- Union européenne en 2016
- États candidats ayant entamé les négociations d'adhésion
- États reconnus candidats

### État des négociations d'adhésion :

**Turquie** : 14 chapitres ouverts, 1 refermé, 18 gelés.  
**Monténégro** : 22 chapitres ouverts, 2 refermés.  
**Serbie** : 2 chapitres ouverts

**ARYM** : reconnue candidate en 2005 ; début des négociations non fixe.

**Albanie** : candidature le 28/04/2009, reconnue le 26/06/2014.

**Bosnie-Herzégovine** : ASA activé.

**Kosovo** : reconnaissance par 23 États membres sur 28.

